

splanr!


Kleuzioù ha girzhier en arvar



Yann Le Sachter

Talvoudus-meurbet eo kleuzioù ha girzhier gwalarn Frañs e-tal reuz direizhder an hin ha diskar ar vev-liesseurterd. Da veur a dra e talvez ar gwez ha brousgwez a gaver er girzhier : kempouezañ an temperadur, gwareziñ an trevadoù diouzh an avel ha diouzh ar sec'hor, dizarbenn ar c'hêrioù pa vez dour-beuz en ur viret an dour er c'hondon... Kement servij degaset d'an endro, met dreist-holl d'ar boblañs a-bezh, padal e kouezh ar c'houst merañ war zivskoaz al labourerien-douar nemetken. Merañ ar c'hleuzioù ha girzhier a c'houlenn amzer hag arc'hant. Evit ma chomfent en o flas e vefe ret sikour al labourerien-douar, ha ma vefe niverusoc'h ar re-se.

10 €
Embannet e miz Ebrel 2024



9 782959 026249

Kleuzioù ha girzhier en arvar

Enklask embannet e miz C'hwevrer 2024

Talvoudus-meurbet eo kleuzioù ha girzhier gwalarn Frañs e-tal reuz direizhder an hin ha diskar ar vev-liesseurted. Da veur a dra e talvez ar gwez ha brousgwez a gaver er girzhier : kempouezañ an temperadur, gwareziñ an trevadoù diouzh an avel ha diouzh ar sec'hor, dizarbenn ar c'hêrioù pa vez dour-beuz en ur viret an dour er c'hondon... Kement servij degaset d'an endro, met dreist-holl d'ar boblañs a-bezh, padal e kouezh ar c'houst merañ war zivskoaz al labourerien-douar nemetken.

Un harz etre ar parkeier eo ar girzhier, pe e vefe ur c'hleuz dindano pe get, pe un hent-don etrezo a-wechoù, padal e vezont degemeret evel skoilhoù gant lod eus al labourerien-douar, dre ma vezont degemeret evel un diaezamant a vez o c'horrekaat ar mekanikoù. Merañ ar c'hleuzioù ha girzhier a c'houlenn neuze amzer hag arc'hant. Evit ma chomfent en o flas e vefe ret sikour al labourerien-douar, ha ma vefe niverusoc'h ar re-se.

Paket eo ar vro gant ul luskad sokial a-berzh al labourerien-douar abaoe un nebeud sizhunvezhioù. Hag hervez labourerien-douar zo ez eo gwarez ar c'hleuzioù a zo un diaester da skarzhañ. Embannet eo bet neuze gant Gabriel Attal, pa oa ret dezhañ degas ur respont, e vefe eeunaet ar reolenadur en e raktres lezenn anvet « evit ul labour-douar emren ».

Daoust d'ar reolennoù a dalvez hiriv an deiz e kendalc'h ar girzhier hag ar c'hleuzioù da vont war fallaat. Ha ken buan m'eo bet souezhet ar glaskerien. E kaoz : patrom askoridik al labour-douar, ha brasaat ar parkeier.

WAR ZISKAR GIRZHIER HA KLEUZIOÙ E BREIZH

N'eus teul ebet e Breizh a renablfe ar c'hleuzioù bet diskaret. Gant Splann ! eo bet kaset un enklask en ul lodenn eus Bro-Dreger, e gwalarn ar vro. Hep mar na marteze e konter 159,2 kmad kleuzioù aet da get etre 2003 ha 2023.

Lod eus ar girzhier bet diskaret zo bet diskleriet ha « kempouezet » gent girzhier nevez plantet, met diaes-mat eo gouzout resis pet, ha m'eo bev c'hoazh ar re nevez plantet.

Sellit ouzh kartenn ar c'hleuzioù distrujet en Bro Dreger war splann.org



LODENN 1

KEMPENN AR C’HLEUZIÒÙ, UR GARG BOUNNER EVIT AL LABOURERIEN-DOUAR page 5

Ur benveg a-bouez-bras evit talañ ouzh direizhamant an hin eo ar c’hleuzioù. Met n’eo ket ken niverus ken al labourerien-douar war ar maezioù, ha n’int ket gwall skoazellet evit gelllet merañ anezho o-unan.



LODENN 2

N’EO KET ECHU GANT DISKAR AR GIRZHIER HAG AR C’HLEUZIÒÙ page 13

E stad fall emañ ar girzhier dre vras. Evit brasaat atantoù ez eus bet diskaret girzhier all e meur a lec’h e Breizh, war dachennoù a oa bet gwarezet betek-henn.



LODENN 3

DIGOR AN DACHENN D’AN DISKAR KLEUZIÒÙ page 21

Sañset e tlefe ar c’hleuzioù bezañ gwarezet. En gwirionez, n’eus ket kalz a dra a vir outo bezañ diskaret. Dister ha gwan ar c’hastizoù, pa ne vez ket an archerien evit o sammañ ar galloud, ha diefedus muzulioù an digoll.



LODENN 4

MET PENAOS SAVETIÑ GIRZHIER HA KLEUZIÒÙ ? page 27

Niverus eo an ostilhoù da wareziñ ar c’harzhaoueg, padal n’eus ket a-walc’h diouto, ha gwall-efedoù zo gant lod outo ouzhpenn-se. Harpañ al labourerien-douar oc’h ober gant doareoù padus, aze emañ an dalc’h.



LODENN 5

GWIENN : KER E KOUST AR C’HEHENTIÑ UHEL GAS D’AR C’HLEUZIÒÙ page 35

Chanterioù troc’hañ prientet fall alies-kaer, diaes da empentiñ en a-raok dre m’emaint er-maez ar reolennoù lakaet war chouk al labourerien-douar ha war ar c’humunioù evit gwareziñ ar gwez.

Boest du

A-hed an enklask-mañ eo bet en darempred kazetennerien Splann ! gant kalzig a beizanted, kannaded, enklaskerien, alvokaded, teknikou-rien garzhaoueg... er pemp departamant Breizh.

Tennoc'h-tennañ eo ar jeu er mare-mañ abalamour da lusk sokial al labourerien-douar. Lod anezho a dag an normoù a zo tro-dro d'ar girzhier, re luziet evito.

Tud zo o deus aon e vefe rebechet tra-mañ-tra dezho evit bezañ bet komzet gant kazetennerien diwar-benn ar sujed-mañ. Setu perak lod zo bet cheñchet oc'h anvioù er pennadoù.

N'hon eus ket bet respont ebet na gant servijoù ar Stad, na gant ministrerezh al labour-douar d'hon c'houlennoù.

Piv eo Splann !

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet. A-drugarez da zonezonoù an dud e c'hall *Splann !* Goprañ kazetennerien da labourat war an hir-dermen hag embann enklaskoù war e lec'hienn internet hag e lizher-kelaouiñ.

Heulit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

KEMPENN AR C'HLEZIOÙ, UR GARG BOUNNER EVIT AL LABOURERIEN-DOUAR

Ur benveg a-bouez-bras evit talañ ouzh direizhamant an hin eo ar c'hleziou. Met n'eo ket ken niverus ken al labourerien-douar war ar maeziou, ha n'int ket gwall skoazellet evit gellet merañ anezho o-unan. Meur a c'harzh, deuet da vezañ skoilhoù evit labourat an douar, zo bet dilezet, pe freuzet.




Yann Le Sac'her

- 】 Pouezus eo ar garzaoueg evit an holl met n'int ket sikouret a-walc'h al labourerien-douar evit ober war-dro ar c'hleziou ha girzhier.
- 】 Luziet-tre eo ar reolennoù hag an normoù tro-dro d'ar girzhier.
- 】 Seul vrasoc'h e vo an tiez-feurm hag ar mekanikoù, seul nebeutoc'h a c'hirzhier a vo.
- 】 Gwashoc'h-gwashañ e vo ar jeu rak ez aio kuit meur a labourer-douar war o leve er bloavezhioù da zont.

Ma rankfed adsevel girzhier, trugarez c'h d'ober an drase pelloc'h. Trawalc'h hon eus bet amañ », eme un den e karg eus an FDSEA e Kreiz-Breizh, da geñver al luskad sokial bras zo bet o lakaat reuz er vro e miz Genver ha C'hwevrer 2024. Sklaer eo ar poziou bet embannet e kelaouennoù ar vro¹, ha reiñ a ra ton d'un emzalc'h a gaver stank a-walc'h e-touez al labourerien-douar : diaes int lakaet gant ar girzhier n'int ket ur chañs evito. N'eo ket simpl neuze teurel evezh war al lodenn-se eus ar glad, padal eo un dra vad evit ar

gevredigezh en he fezh koulskoude. Un diverr-amzer kalet a-wechoù, dreist-holl en atantoù lec'h ma n'eo ket stank al labourerien. Resisoc'h c'hoazh un danevell savet gant Kuzul Jeneral ar Boued, al Labour-douar hag ar Maeziou (CGAAER) « *Talvoudus eo ar girzhier evit ar boblañs, ha daoust da-se al labourerien-douar a chom en o-unan evit talañ ouzh ar frejoù ret evit merañ anezho.* » « *Diasoc'h eo kas ar mekanikoù bras lec'h ma vez gizhier, a zispleg deomp Gilles Ravard, bet e-pad pell labourer-douar el Liger-Atlantel. Ma chomomp speg en ur skourr e kollomp amzer, neuze e kollomp*

MIROUT KARBON



1] « À Callac, l'impressionnant talus sur la RD787 a été inauguré », Anna Sardin Le Télégramme, miz C'hwevrer 2024

arc'hant ! Ne ya ket... Soc'h an erer a c'hell chom luget e gwrizioù ur wezenn ivez... » Rebechoù all a vez graet ouzh ar girzhier ivez : reiñ a reont bod d'al laboused ha d'al loened gouez all a freuz an eostoù, ha disheol a daolont ouzh war an trevadoù.

Pa verkont an harzoù etre div dachenn e teu ar girzhier da vout skoilhoù evit al labour er parkeier pa ranker brasaat an atant. Padal eo pezh a c'hoarvez e Breizh, koulskoude, hag abaoe an 10 vloaz diwezhañ eo kresket an atantoù eus 28 devezh-arat (14 hektar) dre vras [Lennit hon enklask « Brezel er parkeier »]. Ha digresket kement-all niver al labourerien-douar. « *Bras eo ar mekanikoù, o-unan emañ ar baotred, n'eus ket amzer ganto* » eme diouzh e

du Thierry Guéhenneuc, prezidant ar gevredigezh Douar ha Girzhier (Terre et bocage), a vod labourerien-douar ha planterien girzhier. « *Ne droc'hont ket dre ret ar girzhier, rak gouzout a reont ez eo difennet, met tamm-ha-tamm a ya ar girzhier da get, freuzet gant ar mekanikoù, eme Thierry Guéhenneuc c'hoazh. Ne c'hall ket al labourerien-douar ober pep tra o-unan. Hag ouzhpenn-se ez eo ar C'hUMA (Kevelourioù implij ar mekanikoù labour-douar) hag an ETA (embregerezhioù labourioù labour-douar) hag a ra an darn vras eus al labour.* » Evit an embregerezhioù-se a bae o implijidi diouzh an eur, diaes eo koll amzer pa vez graet tro ar girzhier. « *Re vihan eo ar parkeier da geñver ment ar mekanikoù* », eme kambr al labour-douar e Breizh en

« Bras eo ar mekanikoù, o-unan emañ ar baotred, n'eus ket amzer ganto. »

ur ouzhpennañ « *mankout a ra tud evit labourat ivez* ».

DIAESTERIOÙ AR C'HEMPENN

« *Ar bloaz kentañ ma oan war va atant 'moa lakaet da zont paotr un embregerezh evit strewiñ an teil, met n'en deus ket gelllet dont e-barzh ur park abalamour ma oa re strizh an hentoù evit mont betek ar park, ha re a gammdroioù a oa, ha re a wez a bep tu* », eme Clémence, desaverez er C'hreiz-Breizh. « *Ne blij ket ar gwez d'am c'heneiled legumajerien, eme c'hoazh Gilles Ravard. Lâret a reont e tegas loustoni en o zrevadoù. Delioù an derv da skouer, pa gouezhont war ar gwilerig, a c'hell degas ar foma (un doare kebell-touseg), pezh a c'hell desachañ kudennoù da vare an eostiñ, rak "lous" eo an trevadoù ma vez kavet delioù en o c'hreiz.* » Hag alies-mat e nac'h embregerezhioù an agro-boued prenañ ar seurt trevadoù. Ur gudenn ne

« Tro pemzektez labour a rankomp tremen evit kempenn hor girzhier. »

gaver ket ken aliez e rouedadoù berr ar werzh war-eeun.

Ma vez labourerien-douar zo, niverus a-walc'h, o riotal abalamour d'ar girzhier, ez eo ivez abalamour m'eo kalet kempenn anezho, ha ne zegas kazi tra ebet dezho. Pa zeu ar goañv hag ar mare d'ober un tamm krenn d'ar girzhier eo yen ha gleb an amzer. Dañjerus e c'hell bezañ ouzhpenn, dre ma ranker reiñ tro da vinviji lemm, pa vezer pignet un nebeud metradoù diouzh an douar, pe barzh savereziou « graet er gêr » ha n'int ket bepred diouzh ar reolennoù surentez. « *Kempenn ar girzhier, pa veze c'hoazh diouto, aze e oa 90 % eus "amzer vak" ar beizanted er goañv, evel ma tispieg an enklasker Philippe Merot. Dañjerus-hardi e*

oa an diskoultrañ, ha pennkaoz e oa d'an niver brasañ a wallzarvoudoù war an atantoù. » Pa oa erru an adlodennañ, ar boutailhoù Butagaz evit keginañ, hag an dommerezh dredan en tier, eo aet war zigresk an amzer tremenet evit kempenn ar girzhier. Met digresk niver al labourerien-douar en 20 vloaz diwezhañ ivez en deus lakaet da greskiñ niver ar c'hilometradoù girzhier a chom dindan evezh pep hini anezho. Etre 1996 ha 2008 eo aet hirder dre vras ar girzhier dre atant eus da 3,2 à 4,9 km, da lâret eo ur c'hresk a 50 %².

UR C'HOUST HA N'EO KET DISTER

« *Tro pemzektez labour a rankomp tremen er goañv evit gellet kempenn hon 8 kilometrad girzhier* », a zispieg deomp Sylvie, desaverez saout laezh en Iha-Gwilen, aet war he leve nevez zo. Rouez eo neuze al labourerien-douar a ra war-dro o holl c'hirzhier, un hanocherez etre o daouarn, evit gellet ober troc'hoù krenn ha splann, pezh a vez o lonkañ kalzig amzer hag e c'houlenn ur chemed, doareoù ober aet da get alies a-walc'h. Kalzig a dud a c'halv neuze embregerezhioù labour-douar (ETA) a zeu gant o diskoultrerez, ha war o lerc'h e chom skirioù e-leizh, alese gwez gwanoc'h, taget gant kleñvedoù ha

2]« La haie, levier de la planification écologique », diell n°22114 eus ar CGAAER, Catherine de Menthière, Patrick Falcone, Vincent Piveteau, Xavier Ory, ministrerezh al labour-douar, miz-Ebrel 2023



Yann Le Sachter

kebell-touseg. « *Gwir eo n'eo ket brav an troc'hoù, met d'an nebeutañ ez eo troc'het ar girzhier memestra ha kreñvaat a ra kalon ar girzhier* », a anzav c'hoazh Sylvie, souezhet atav gant an nerzh a vez gant ar gwez o kreskiñ en-dro memestra. Sylvie n'he deus ket graet ar gont eus koust kempenn he girzhier. « *Ul lodenn eus al labour eo ha mat pell zo* », emezi. Met anat eo e pouez al labour-se war gontoù an atantoù. « *Pa ranker dibab etre meur a chanter, n'eo ket hennezh a vez graet da gentañ, rak ne zegas ket a c'hounidegezh, zoken ma pakez ar c'hoad evit*

tommañ da di », emezi c'hoazh. Hervez danevell ar CGAAER³, tro 450 € ar c'hilometr bep bloaz a vefe koust kempenn ur c'harzh. Ma reomp ar gont eus an 8 kilometrad girzhier zo war dachenn Sylvie e teu ar c'houst da 3.500 € ar bloaz. Ur sammad dister evit un atant a dro mat, met start da lakaat er-maez evit ar re a rank sec'hiñ an eil dorn gant egile (ha niverus a-walc'h int). E framm ar politikerezh labour-douar boutin (PAC) 2023-2027 eo bet divizet gant ar Frañs lakaat e pleustr ur « *bonuz girzhier* » kement ha... 7 € dre hektar

3]« La haie, levier de la planification écologique », diell n°22114 eus ar CGAAER, Catherine de Menthière, Patrick Falcone, Vincent Piveteau, Xavier Ory, ministrerezh al labour-douar, miz-Ebrel 2023

evit pep labourer-douar. Met ret eo dezho bezañ gouest justifiañ kaout 6 % a c'hirzhier d'an nebeutañ, ha bezañ engouestlet en ur steuñv merañ padus ar girzhier testeniet (Plan de Gestion Durable des Haies, PGDH), e doare « *label Haies* ». Etre 1.500 ha 2.000 € eo koust sevel ar steuñv, ha 350 € skodenn vloaziek ouzhpenn. Dav eo bezañ entanet-mat dija evit kregiñ ganti. « *N'eo ket talvoudekaet labour al labourerien-douar gant ur sammad a 7 € dre hektar, pa reont gant un doare merañ padus o girzhier, met ne ro ket tro dar re all merañ en doare padus* », a zisplege an AFAC, kevredigezh brudañ ar girzhier e miz Genver 2023. Ha da c'houlenn e vefe talvoudekaet gant 25€/ha.

Skoazelloù all zo bet kinniget : ar Maec, muzulioù agro-endro hag hin « *Bevliested - kempenn padus ar frammoù agro-ekologel* » a ya betek 800€/ha girzhier. Evit gellet pakañ anezho, dav eo sevel ur PGDH hag heuliañ ur stummadur. Padal n'eo arc'hantaouet hini ebet eus ar redioù-se.

LUZIET-KENAÑ A-FED MELESTRADUREL

Abae 2015 ez eus ivez skoazelloù dre zevezh-arat a ra gant gorread ar c'hleuzioù, met n'eo ket aes kompren o vont en-dro dre ma komzer aze eus « gorreadoù a c'hell degemer skoazelloù »,

p'emañ ar girzhier e-touez ar « gorreadoù e-maez labour-douar (SNA) » ! Evit gellet pakañ anezho e rank al labourerien-douar treiñ hirder o girzhier e « gorreadoù interest ekologel (SIE) »⁴. « *Kement-mañ-kement a metradoù karrez SIE e ra pep gwezenn hec'h-unan, a zisplege deomp Serge, ur peizant staliet war un atant lies-gounezerezh ha desevel saout-laezh ha deñved e bio e 2015, aterset gant enklaskerezh Blandine Mesnel. Met penaos e fell deoc'h kontañ se ? Metradoù karrez SIE evit ar gwez ?*

Gwez e-leizh em eus, ha girzhier e pep lec'h... N'ouzon ket peseurt mod e raimp ? »

Met ar c'hudennoù hag ar reolennoù trodro d'ar girzhier a ya pelloc'h eget framm ar

PAC, Ret eo ivez d'al labourerien-douar ober gant ar brastresoù rannvroel kempoell ekologel (schémas régionaux de cohérence écologique pe SRCE), deuet diwar Grenelle an endro bet adaptet goude-se e brastresoù rannvroel an aveadur, diorren hag ingalded an tiriadoù (SRADDET), hep kontañ ar steuñv lec'hel ar c'hêraozañ PLU ha PLUI, a vez marc'hataet e live pep kumun pe kumuniezh kumunioù, pa vez renablet lod eus ar girzhier ganto. Hep disoñjal kod an endro a dalvez da wareziñ ar girzhier, ha pelloc'h, annez al laboused gwarezet. « *Ha gwelet teus ar sturiad Annezioù (directive habitat) ?*

Emañ ar girzhier e-touez ar « gorreadoù e-maez labour-douar (SNA) » !

4] « Dossier PAC, campagne 2021, déclaration des surfaces d'intérêt écologique (SIE), synthèse des conditions d'éligibilité et de déclaration », DDTM, ministrerezh al labour-douar, 2021

Kerzh da glask lenn anezhañ ! N'on ket tremenet dre skol-veur ar Gwir, memestra ! », eme Benoit Alain, desaver loened e Ploubêr (Treger), dipit en e vouezh.

Reolennoù, sturiadoù ha pape-rachoù bern-war-vern, diboell eo erru an traoù pa ouzer n'eus dañjer ebet bezañ kastizet evit ar re ha ne sentfe ket ouzh ar reolennoù-se [Lennit hol lodenn 3]. Met al labourerien-douar en em sant dindan wask an evezhierien koulskoude. Pezh a zo un diaester ouzhpenn evit implijidi an OFB, (Ofis Frañs ar Vevliesseurted) ha pa n'int ket gwall niverus evit ensellet ar girzhier. Thierry Guéhenneuc, prezidant ar gevredigezh Douar ha Girzhier, a zispleg deomp : « *Kement-se a lak enebiezh etre labour-douar hag ekologiezh, n'eo ket gant se ez aimp war-raok ! N'heller ket kaout diouzh un tu al labour-douar a zegas boued, ha diouzh an tu all politikerezh an endro a vez o staliañ digolloù.* »

Cheñch an traoù evit ma vefe simploc'h ar velestradurezh tro-dro d'ar girzhier, setu ar pezh a vez goulennet gant labourerien-douar zo a oa o vanifestiñ e-pad ar goañv, hag ivez gant kevredigezhioù a stourm evit ar c'hleuzioù, evel an Afac. Kemenet eo bet gant ar gouarnamant e vefe skarzhet normoù met evit poent e chom dispis a-walc'h an traoù. Aon o deus ar c'hevredigezhioù a zifenn an natur e teufe da vezañ aesoc'h distrujañ ar c'hleuzioù⁵.

Evit poent e chom dispis a-walc'h kemennoù ar gouarnamant.

« *Ur politikerezh a vroudfe d'ar staliañ girzhier n'eus riskl ebet da zont a-benn, eme ouzhpenn ar sokiologourez Catherine Darrot he doa kaset un enklask a-benn diwar-benn Breizh Bocage 1 ha Breizh Bocage 2, programoù saveteiñ ar girzhier bet roet lañs dezho gant rannvro Breizh. Dav eo mont adalek an eienenn, da lâret eo e live ar PAC ha politikerezh labour-douar ar Rannvro : peseurt patrom a vezont o skoazellañ, da biv 'ta e vez roet ar gwir kaout ar font ?* ». Enklaskoù bet kaset en-dro gant ar sokiologourez e kompagnunezh Marie Toussaint hag a ziskouez « *ez eo sujet amzer da zont ar girzhier ouzh an doareoù sevel chatal war ar peuriñ, pezh a vez alies dindan al label labour-douar biolo-gel* ». Padal e weler ez eer war-zu kresk

5] « La biodiversité sacrifiée sur l'autel de la crise agricole », LPO, miz C'hwevrer 2024

an douaroù dindan edoù e Breizh, ha digresk niver an desaverien loened [Lennit hon enklask « Brezel er parkeier »].

« Mirout kement desaverien loened ha ma c'heller, sed aze hor youl bolitikel, a gadarna Carole Le Béhec, e karg eus ar « steuñv gwez » er rannvro. Met ur gwir gudenn hon eus evit degas tud nevez war ar vicher. Prederiet-mat omp gant se. O klask sevel traoù el liseoù emamp met n'omp ket mistri war ar programmoù », eme an dilennadez ouzhpenn. Gant ar ministrerezh al labour-douar e vezont savet, Ha tanav ar spi diouzh an tu-se... « Labour-douar stank-ha-stank eo an doare pennañ, ha n'eus youl ebet eus tu ar ministrerezh da cheñch tu, eme Dominique Blivet, kelenner en ul lise labour-douar ha kannad ar sindikad Sud rural. N'eus

ket a c'hoant gwirion da vont war-zu an treuzkemm. »

Gant kelennerien zo e vez kaset endro programmoù youlek-mat tro-dro d'ar pezh a vez degaset a-vad gant ar girzhier evit talañ ouzh dañjerioù tom-madur an hin, ar gwallamzer, an dourioù-beuz ha digenvezded ar maezioù. Met dister e chom o c'homzoù e-tal ar vuhez gwirion. « Poent bennak 'zo em boa kelennet e Tiez Familhoù war ar Maez (FMR, lec'h ma vez stummet lod eus al labourerien-douar), eme Gilles Ravard, labourer-douar eñ ivez. Komz a rae eus ar girzhier, ha plantet e veze war lod eus an atantoù. Met pa zistroe ar re yaouank d'ar gêr e veze lâret dezho gant o zud : petra 'n diaoul 'zo bet kontet dit aze ? Forzh petra eo ! »

**Yann-Malo Kerbrat
ha Nolwenn Weiler**

N'EO KET ECHU GANT DISKAR AR GIRZHIER HAG AR C'HLEUZIOÙ

E stad fall emañ ar girzhier dre vras. Evit brasaat atantoù ez eus bet diskaret girzhier all e meur a lec'h e Breizh, war dachennoù a oa bet gwarezet betek-henn.




- 】 Aet eo war-raok diskar kalite ar girzhier, en desped d'ar postadurioù foran.
- 】 Diskaret eo bet meur a dakad girzhier war gleuzioù e Kreiz-Breizh.
- 】 Mont a ra ar girzhier da get dre ma ya an desaverezh saout da get ivez, ha dre ma kresk c'hoazh an atantoù evit mont war-zu ur patrom askoridik eus al labour-douar.
- 】 159,2 gilometrad a c'hirzhier bet diskaret e-doug an 20 vloaz tremenet, war un dachenn a c'houzañv gant ar glandour (ar « bezhin glas »), ha lec'h ma tremen ur stêr gouez hep par e traoñienn al Leger.

P'o deus adaptet ma douaroù o deus diskaret pep tra, evit "kempenn" an dachenn. Peder lodenn a veze, pa ne chom nemet un bremañ. Gwez derv kaer a oa aze, bet savet eno ganin, pe-bezh poangalon a ra me lâr dit ! » Maurice, labourer-douar war e leve e Bro-Goëlo, c'hwerv e galon pa wel pegen disteraet eo erru an ardremez a oa bet dindan e garg gwechall. Ha n'emañ ket e-unan, pell alese, war zisteraat e ya ardremez ha bev-liesseurted ar girzhier e Gwalarn ar Frañs¹, ha buanoc'h zoken eget pezh a oa an enklaskerien o c'hortoz. Thibaut Preux, douaroniour en

deus savet un dezenn war treuzfurmadur ar c'harzhaoueg normant, ha gant ul labour studi e Kreiz-Breizh evit poent, a zispleg : « Emaomp gant ur mare a freuz an dremm-vro. Souezhet omp bet pegen buan, pegen don e bet ar c'hemm en dremm-vro, an hevelep hini forzh pe-seurt takad a studier. »

Rak kenderc'hel a reer da ziskar girzhier ha kleuzioù. Ha gwashoc'h zo : buanoc'h an diskar eget e-doug an 10 vloaz tremenet. Bep bloaz ez eo tro-dro da 23.500 km girzhier a ya da get er Frañs a-bezh. 70 % outo aet da get abaoe adlodennañ ar bloavezhioù

DA BETRA A SERVIJ UR GARZH



1] « Biodiversité des terres agricoles : la contribution de la PAC n'a pas permis d'enrayer le déclin », Lez ar c'hontoù Europa, 2020

1950. Ha n'eur ket prest da cheñch penn d'ar vazh : « *Diskar ar c'hleuzioù hag ar girzhier a ya dre ret da heul kemouñ patrom al labour-douar*, evel m'eo displeget e danevell Kuzul jeneral ar boued, al labour-douar hag ar maezioù (CGAAER)², bet roet en-dro da vinistrerezh al labour-douar e miz Ebrel 2023. *Stankoc'h ar produksionoù, digresket ar saverezh chatal war ar peuriñ, digresk ingal niver al labourerien-douar ya ya da heul kresk ment an atantoù o deus lakaet ar c'hleuzioù e renk ar redioù evit al labourerien-douar.* » Gant kambr labour-douar Breizh e vez lâret ar memes tra : « *abalamour d'an tiez-feurm o vrasaat e-touez traoù all emañ an arvar ar girzhier* ».

Anat eo koulskoude e kas diskar ar c'hleuzioù d'ur c'holl bras, hini ur skoazell e-tal digresk spontus ar vev-lies-seurted, ha dilerc'hioù kemmadur an hin : dourioù-beuz spontus, sec'hor bras, saotradur an dour, mareadoù hir amzer gor, gwall-reuzioù e-leizh gwashaet gant diskar girzhier ha kleuzioù. Tro m'emañ ar vro o prientiñ tun

tommadur a +4°C³ ez eo ur redi mirout koulz girzhier ha kleuzioù, evit al labour-douar kement hag evit hollad ar gevredigezh⁴.

KALITE AR C'HLEUZIOÙ A YA WAR FALLAAT

E-tal an dremmvro o paouraat kement eo bet roet lañs gant Rannvro Breizh d'ur programm adplantañ anvet « *Garzhaoueg Breizh (Breizh Bocage)* »⁵ e 2007. El Liger-Atlantel e kaver ar framm rannvroel « *Garzhaoueg Liger hag Agro-koaderezh Liger (Bocage et agroforesterie)* »⁶ roet lañs dezhañ e 2020. N'eo ket dister ar strivoù bet graet evit plantañ (tro 6 500 garzh bet plantet abaoe 2008) ha frank a-walc'h ar yalc'hadoù. Daoust da-se ez eo meneget e danevell ar CGAAER⁷ n'hell ket ar politikerezhioù foran bet lakaet e plas evit sevel kleuzioù : « *M'eo bet pouezet alies-mat war ar sevel kleuzioù nevez e rankfed da gentañ gwareziñ gwelloc'h ar re a zo dija.* »

Abaoe 2020 e seblant bezañ stabilaet⁸ an niver a gilometradoù kleuzioù e

2] « La haie, levier de la planification écologique », diell n°22114 eus ar CGAAER, Catherine de Menthière, Patrick Falcone, Vincent Piveteau, Xavier Ory, ministrerezh al labour-douar, miz-Ebrel 2023

3] « Réchauffement climatique : +4°C en France métropolitaine d'ici la fin du siècle ? », penn-renner ar c'helaouñ lezennal ha melestradurel, Buhez foran, miz Mae 2023

4] « Des haies bocagères, pour le climat et l'environnement », Catherine Foucaud-Scheunemann, Inrae, miz Kerzu 2020

5] « Évaluation du programme Breizh Bocage 2 », Tanguy Chever, Sibylle Parant, Adèle Gonçalves, Sébastien Guilbert, Rannvro, miz Ebrel 2021

6] « Règlement d'intervention, mise en place de systèmes agroforestiers », diell ar Feader, Rannvro Breizh, miz Gwengolo 2022

7] « La haie, levier de la planification écologique », diell n°22114 eus ar CGAAER, Catherine de Menthière, Patrick Falcone, Vincent Piveteau, Xavier Ory, ministrerezh al labour-douar, miz-Ebrel 2023

8] « Évaluation du programme Breizh Bocage 2 », Tanguy Chever, Sibylle Parant, Adèle Gonçalves, Sébastien Guilbert, Rannvro, miz Ebrel 2021

Rannvro Breizh. Kompezet ar c'heloù gant an Draaf (Renerezh rannvroel ar boued, al labour-douar hag ar c'hoadoù) koulskoude : ma chom stabil an niver a gilometradoù girzhier, disheñvel eo evit pezh a sell ar kleuzioù noazh, hep garzh warno, gant un digresk a 26 % etre 2008 ha 2020, ha memes tra evit 10 % eus al lezioù koadoù. Stabil eo neuze an niver a gilometradoù, met dis-teraet eo eus 4 % ar c'harzhaoueg (da lâret eo girzhier, kleuzioù noazh ha lez ar c'hoadoù.

DIBOSUPL EO KEMPOUEZAÑ UR GARZH

Ar gudenn a zeu eus ar fed e ra ar sifroù gant hirder ar c'hleuzioù pe girzhier nemetken. Ne zalc'hont ket kont eus efedusted gwirion ar girzhier : e stad fall emañ garzhaoueg Breizh, ne vez ket graet mat war-dro 80 % eus girzhier ar vro ha war an dalaroù emaint [lennit pennad 1]. Aze emañ abeg pennañ krignerezh⁹ ar c'hleuzioù, a-raok ar rezañ. Diouzh un tu all, evit ar PAC, politikerezh boutin al labour-douar, ez eo ur c'harzh nevez evel ur bantenn yaouank : gellet a ra al labourerien-douar diskar anezho kement ha ma kar, gant ma vo « kempouezet »¹⁰ gantañ an hevelep hirder un tamm pelloc'h¹¹.

« *N'heller ket kempouezañ un hirder girzhier efedus, stank ha fetis, gant ur c'harzh yaouank savet diwar gwez daou vloaz plantet a-hed ur savadur* », evel ma tispleg Julie Le Pollès, teknikourez garzhaoueg e sindikad Bae Douarnenez (Epab, 29). Ma ne reer nag evezhiañ na kempenn [lennit pennad 3], e varv meur a c'harzh bet savet evit kempouezañ : « *Ma ne reer ket war-dro ur c'harzh e c'heller tizhout ur feur treuzvevañ ar plant eus 20-30 %. Padal ne c'hortozer ket ar c'halite pa ne seller nemet ouzh an hirder a kleuzioù, ur gudenn vras eo.* »

TORRET AN DREMMWEL E KREIZ-BREIZH

E 2022 e Speied (29), e kalon un takad lec'h m'eo stank ar girzhier, ez eus bet freuzet pevar c'hilometrad girzhier ha kleuzioù¹², ha « kempouezet » int bet. Un darvoud en deus savet kalon darn eus tud Kreiz-Breizh, aet d'en am aozañ ha da sevel kenstroloù anvet « Kleuzioù » just a-walc'h, evit difenn al lodenn-mañ eus glad en endro.

Kizidik eo an afer el lodenn-mañ eus ar vro lec'h ma chom a-sav un niver bras eus an atantoù produiñ laezh, ha pa vezont gwerzhet evit kreskiñ an atantoù nesañ, gant an diouer a dud yaouank a fell dezho adkemer atantoù bihan. « *D'an daoulamm emañ ar filierenn a-bezh war*

9] « Webinaire Afac Agroforesterie Bilan de Breizh Bocage 2 », Rannvro Breizh, miz C'hwevrer 2022

10] « Évaluation du programme Breizh Bocage 2 », Tanguy Chever, Sibylle Parant, Adèle Gonçalves, Sébastien Guilbert, Rannvro, miz Ebrel 2021

11] « BCAE 8 - Maintien des éléments topographiques », prefeti an Ain, miz Mae 2023, lec'hienn internet bet sellet ouzh e miz Meurzh 2024

12] « Part minimale des terres arables consacrées à des éléments favorables à la biodiversité. Maintien des éléments topographiques du paysage. Interdiction de couper les haies et les arbres pendant la période de nidification », diell diwar-benn ar BCAE8 e-keñver ar PAC 2023-2027, ministrerezh al labour-douar

adframmañ, dreist-holl abalamour m'eo hentet muioc'h-mui gant renerien industriezh al laezh, evel ar strolladoù bras evel Lactalis, pe ar c'hevelourioù evel Agrial..., a zispleg deomp Thibaut Preux, kelenner skol-veur. Moarvat eo an adframmañ-se en do ar brasañ levezon war an dremmvro, ha dreist-holl war ar fed e vo miret an dibarderioù evel girzhier ha kleuzioù, ar pradennoù-pad, hag erfin kalite an dour.»

Bras a-walc'h eo an dizingalderioù etre triadoù Breizh. En takadoù ar vro lec'h ma oa bet eeunaet ar c'harzhaoueg abaoe ar bloavezhioù 70 ne cheñch ket re an traoù. E plasoù zo zoken e c'heller merzhout an hed kleuzioù bet gounezet a-drugarez d'ar gevredigezh Breizh Bocage : war diazad doureier Douarnenez, lakaet e rumm « diazad bezhin glas (glandour) », e vefe bet gounezet tro 60 kilometrad girzhier, hervez an istimadur bet kaset deomp gant an deknikourez Julie Le Pollès. N'eo ket tre an hevelep lañs tro kreiz ar vro : eus Menez Are d'ar C'hreiz-Breizh, en ur dremen dre Greiz Treger, lec'h m'eo stank c'hoazh gwiad ar girzhier war ar c'hleuzioù, n'eus douetañs ebet e ya kalite ar c'harzhaoueg war an diskar abaoe nebeut amzer.

159 KMAD KIRZHIER DISTRUJET E BRO-DREGER

Start eo neuze gouzout resis peseurt hirder girzhier ha kleuzioù zo aet

« 2015 : ur bloavezh spontus evit girzhier ha kleuzioù. »

da get war dachenn Vreizh a-bezh. Kevredigezhioù zo, evel Dour ha Stêrioù Breizh, hag al lec'hienn Gedourez an Natur (Sentinelle de la Nature), a boagn evit renabliñ ar re a anavezont hep dont a-benn da dapout anezho holl. Boulc'het eo bet al labour en Treger gant *Splann !*, dre ul labour war barre-zioù ar SAGE Bae Lannuon, gant un teul a sav strategiezh lec'hel merañ an dour, ha sklaer eo an disoc'h : 157,4 km hirder a girzhier ha kleuzioù bet diskaret etre 2003 ha 2023.

An diskar en e varr : spontus eo bet mare ar bloavezhioù 2014-2016, dres a-raok ma vefe lakaet e pleustr ar PBLD (PAC, Politique Agricole Commune). Aze e oa lakaet ar girzhier ha kleuzioù da « goredoù nann labour-douar (SNA) », a veze tennet diouzh peurrest ar « goredoù labour-douar ». C'hoarvezet eo pezh a oa da c'hortoz : meur a labourer-douar a oa nec'het e vefe bet tennet diganto ar skoazelloù war an tachennoù ne oant ket jedet evel takadoù labourer.

Ret eo d'an teknisianed kavout ar sifroù o-unan.

Padal e c'haller degemer yalc'hadoù evit ar c'hleuzioù. Ne vern, hadet ar reuz, ha gant aon ma vefe bet sanktuarizet o c'hleuzioù, ha difennet ober seurt ganto, eo bet kavet gwelloc'h gant un toullad mat a labourerien-douar diskar anezho a-raok ma vefent rena-blet war ar c'hartennoù. Ar PBLD (PAC) nevez-se a oa e bal gwareziñ anezho en deus degaset ur gwall zistruj a-benn ar fin.

Neuze, pet kilometrad girzhier ha kleuzioù bet diskaret e-doug ar prantad-se ? Start eo da lâret, dre ma 'z int bet diverket diouzh ar c'hartennoù : « *Izpriziet eo bet eus 30 % d'an nebeutañ hollad hirder ar c'hleuzioù* », hervez kevredigezh harpañ ar girzhier Afac-Agroforesteries¹³ en un danevell gouestlet d'an diviz-se bet tapet gant ar PBLD evit « *gwareziñ girzhier ha kleuzioù* ». « *Ma n'o defe ket bet difennet diskar ar c'hleuzioù ne vefe*

ket bet diskaret an hanter eus pezh zo bet graet », a zispleg ul labourer-douar e tezenn Léo Mangin¹⁴.

« NE OUEZOMP KET PET KIRZHIER ZO BET DISTRUJET »

Hiriv an deiz e vez teknikou-rien o labourat evit ar c'humuniezhoù lec'hel pe sindi-kadoù an diazadoù doureier oc'h heuliañ pezh a c'hoarvez gant ar c'hleuzioù. Hervez ar

gefridi fiziet enno ez int karget da zispakañ pezh a vez plantet gant Breizh Bocage, met ivez reiñ kuzulioù d'al labourerien-douar a fellfe dezho « diblasañ » ur c'hleuz (ret eo kompren : « distruj » ha « kempouezañ »), ha da evezhiañ emdroadur ar gwiad kleuzioù war hollad an tiriad dindan o c'harg. Met start a-walc'h an traoù evito : tost dibosupl eo kaout sifroù a c'heller fi-ziañ enno, ha lakaet diouzh an deiz.

Diglok eo ar roadennoù kartennoù, daoust m'eo aet war-raok al labour, ha fazioù a chom warno; abalamour m'eo bet lakaet « labourerien likoù » estren vro da labourat evit servijoù ar Stad evit anavezout ar girzhier war ar fotoioù dre nij. An RDTM a c'hell teurel ur sell hollek war an teuliadoù diskar kleuzioù bet diskleriet, met alies-kaer n'hell ket an deknikourien lec'hel mont war ar plas. « *Ne ouzer ket pet kilometrad*

13] « Bilan d'application de la BCAA 7 en France et propositions d'amélioration dans le cadre de la nouvelle PAC », Afac-Agroforesteries, miz Mae 2021

14] « La haie requalifiée. Enquête sur un dispositif d'écologisation de la Politique agricole commune (2014-2019) », Léo Magnin, Skol Veur Pariz-Reter, 2021



Yann Le Sachter

zo bet diskaret, a glemm Gwenaëlle¹⁵, un deknikourez garzhaoueg. *Bep taol e c'houlennomp digant an RDTM perak n'eo ket bet niverelaet ar c'hleuzioù diskaret hag anavezet ganto, met ne gomprenomp ket penaos e reont war-dro an afer-se.* »

D'an deknikourien d'en em zifretañ en o-unan evit klask tapout ar roadennoù diwar-benn emdroadur ar gwiad girzhier ha kleuzioù war o ziriad, da gas da benn o labour kartennaouiñ, un diverr-amzer spontus eo. « *N'omp*

ket sikouret gant an RDTM, ha c'hoazh ne lâromp ket an hanter », eme Erwan, teknikour war ar c'harzhaoueg en ur strollegezh. Deut eo a-benn da gaout, « *dre hentoù kuzh* », ur strobard kartennoù e dalc'h servijoù ar Stad. « *Harzet omp gant an RDTM evit ma ne rofemp ket an titouroù-se d'an dud a labour war an dachenn* », emezañ c'hoazh. En ur gemer skouer war he ziriad, lec'h m'eo bet asantet gant an RDTM reiñ niver an teuliadoù a heuliont, met hep reiñ

15] An tud a zo ho anv bihan en destenn hepken zo bet cheñchet oc'h anv.

lec'hioù resis ar c'hilometradoù kleuzioù e kaoz, ec'h ouzhpenn Julie Le Pollès, un deknisianez garzhaoueg : « *Diaesaat a ra hol labour heuliañ gwiad ar c'hleuzioù. Kavout a ra dimp ez eus bet kollet war-dro 14 km girzhier ha kleuzioù [abaoe 2013, NDLR]. Gouzout a reomp ez eus bet kempouezet 1,7 km, met ne ouzomp seurt evit ar peurrest.* » Hini ebet eus an RDTM war pemp departamant he deus respontet d'hon c'houlennoù.

« DARN VRAS AN DISKAR KLEUZIOÙ N'INT KET DISKLERIET »

« *Hep ur renabl a-zeiz-da-zeiz ez eo start lâret ez eo stabilaet ar c'harzhaoueg, etre pezh zo distrujet ha pezh a saver a-nevez, a zispleg Ronan, un teknisian garzhaoueg. Ken buan all ez eus bet diskaret an henter muioc'h eget pezh a vez lavaret, ha ne ouzomp ket !* » Ha diaesoc'h c'hoazh heuliañ stad ar c'hleuzioù pa vezont diskaret hep tamm diskleriadur. War diazad doureier ar Stêr Aon, da skouer, ur renabl bet graet gant un naturalour evit ar gevredigezh Breizh Vev a ziskouez en tu all da 55 kmad kleuzioù bet diskaret war 6 kumun hepken, eus Sant Riwal da Skrigneg,

etre 2005 ha 2022. Diouzh ar pezh a ouezomp, n'eus ket bet plantet girzhier all evit ar re zo bet distrujet.

Padal ez eus bet plantet un tregont kilometr bennak a girzhier¹⁶ en dek vloaz tremenet gant sindikad an diazad doureier, war un dachenn a c'holo 49 kumun¹⁷. Kalz nebeutoc'h eget an distruj bet renablet war ul lodennig hepken eus an tiriad-se. « *Ne vez ket diskleriet pezh a vez diskaret, ne vez gwelet gant den ebet, ha d'am soñj eo pezh a c'hoarvez evit darn vras ar c'hleuzioù diskaret. Dianav e chom d'an holl* », eme c'hoazh an teknikour war ar c'harzhaoueg, hag a soñj dija e yelo un toullad mat a labourerien-douar all war o leve, kresket e vo c'hoazh an atantoù, ha kresket c'hoazh niver ar c'hleuzioù diskaret.

« *Re ziwezhat eo, ne zeuimp ket war hon c'hiz en-dro, eme trumm Maurice, labourer-douar war e leve e Bro-Goëlo. Ha dre ma kaver nebeutoc'h-nebeutañ a labourerien-douar, ha gwashoc'h vo c'hoazh en dazont, e vo strollet atantoù all c'hoazh, diskaret 'vo kleuzioù ha girzhier dre ret. Arabat en em douellañ.* »

**Yann-Malo Kerbrat
ha Nolwenn Weiler**

16] « Depuis dix ans, l'Epaga restaure des haies dans les exploitations agricoles », Anaëlle Larue, Le Télégramme, miz Kerzu 2023

17] Diell ar prefeti n°2008-0339 diwar-benn krouidigezh sindikat an dour « Établissement public d'aménagement et de gestion du bassin versant de l'Aulne - EPAGA », prefeti Penn-ar-Bed, miz Meurzh 2000

DIGOR AN DACHENN D'AN DISKAR KLEUZIÒÙ

Sañset e tlefe ar c'hleuzioù bezañ gwarezet. En gwirionez, n'eus ket kalz a dra a vir outo bezañ diskaret. Dister ha gwan ar c'hastizoù, pa ne vez ket an archerien evit o sammañ ar galloud, ha diefedus muzulioù an digoll.



Yann Le Saclier

- 】 N'eus tra ebet evit ma vefe gwarantet ma chomo bev ar girzhier « kempouezañ », dre ma ne vezont ket heuliet na kontrollet.
- 】 N'eo ket gant an nebeud a gastizoù a vez gant ar PBLD (PAC) e vez miret da freuziñ kleuzioù.
- 】 N'eo ket renablet na gwarezet an holl gleuzioù, na gant ar PBLD (PAC) na gant ar SLK (PLU).
- 】 Distrujoù zo ha n'int ket diskleriet, graet e vezont tamm-ha-tamm evit tremen e-bioù d'ar c'hontrolloù.

War-lerc’h un hir a veaj a-dreuz runioù ha torgennoù an Argoad, eur ar c’hoadoù d’ar mor, setu ma erru ar Stêr Aon e morlenn Brest (29). Kaer-eston an dremmvro gouez. Padal, tost da 150 km en argrec’h, e kumun vihan Lohueg, lec’h ma kaver eienenn ar Stêr, aze eo kollet braventez ar c’harzhaoueg. Distrujet unan-hag-unan ar girzhier bet plantet gwechall war ar c’hleuzioù, en ur reiñ d’ar vro un ardremez, ha dindan un nebeud bloavezhioù nemetken, evel ma tiskouez ar renabl bet graet gant *Splann* !. Met penaos ta ? Gwarezet eo ar girzhier

gant ar reolennoù labour-douar koulskoude ! Met netra na seblant kreñv a-walc’h evit talañ ouzh an distruj.

DISTRUJ DIOUZH UN TU, PLANTAÑ FALL EN TU ALL


Evit ma c’hellfent pakañ skoazelloù european ar PBLD (Politikerezh Boutin al Labour-Douar) e rank labourerezed ha labourerien-douar ar vro doujañ ouzh « Doareoù Dereat al Labour-Douar hag an Endro » (BCAE 8)¹ a zo sañset gwareziñ ar girzhier. Rak renablet eo girzhier ha kleuzioù war ur gartenn² a vez implijet gant Ajañs Servij ha Paeamant (ASP)³, ur servij eus ar Stad, karget gant ar RDTM



IGN - Orthophoto 2003 et Ortho-ASP-PAC 2023

"Dremm ar maezioù en Lohueg (22) 'deus cheñchet kalz tro war-dro da sav-dour stêr an Aon. Etre 2003 ha 2023 'zo bet distrujet kilometradoù a gleuzioù (linennoù en ruz). Kit war splann.org evit sell ouzh ar gartenn.

1] « La PAC 2023-2027 - la conditionnalité », destenn da zisplegañ, ministrerezh al labour-douar
 2] « Registre parcellaire graphique (RPG) : contours des parcelles et îlots culturaux et leur groupe de cultures majoritaire », Pennadurezh broadel an titouroù geografiezh hag ar c’hoadoù, miz Meurzh 2024
 3] « Système de suivi des surfaces agricoles en temps réel », Ajañs ar servijoù hag ar goprou



(DDTM, Direction départementale des territoires et de la mer) da lakaat da dalvezout ar PBLD. Kudenn gentañ : meur a c'harzh ha meur a gleuz ne vezont ket renablet warno, pe n'int ket enrollet evit pezh int [lennit pennad 2]. Gellet a ra n'eus forzh piv distruj anezho hep tamm diskleriadenn hag hep kempouezañ anezho. Pa fell d'ul labourer-douar distruj ur c'harzh renablet e rank « kempouezañ » anezhi en ur blantañ un hirder kevatal, lec'h all war e zouaroù. Ma fell dezhañ distruj en tu all da 2 % eus hirder hollad ar c'hleuzioù zo war e atant, e rank sevel un teul, gant sikour un teknikour

grataet⁴, Gwenaëlle⁵ da skouer : « *Mont a ran war an dachenn, ha sevel a ran an teul, setu tout. Ne zeuan en-dro gwech ebet. D'al labourer-douar eo da fiziañ e deul, ha dre m'eo hervez e ziskleriadenn hepken, e vez respontet "Ya, ya, reizh eo ho teul" gant an DDTM. Pik echu. Ne ya den morse da wellet war al lec'h m'eo bet plantet ar c'harzh en-dro.* » Ne oar ket an teknikour zoken m'eo graet mat a-walc'h war he zro evit ma chomfe bev ar gwez enni, na zoken evit gwiriañ m'eo gwir e oant bet plantet. « *Den na c'houlenn gwelet an disoc'h* ». N'he deus ket respontet an DDTM d'hon c'houlennoù.

4] « Part minimale des terres arables consacrées à des éléments favorables à la biodiversité. Maintien des éléments topographiques du paysage. Interdiction de couper les haies et les arbres pendant la période de nidification », diell displegadur ar BCAE 8 e-keñver ar PAC 2023-2027, ministrerezh al labour-douar

5] *An tud a zo ho anv bihan en destenn hepken zo bet cheñchet oc'h anv.*

Bremañ ma fell d'al labourer-douar diskar nebeutoc'h eget de 2 % eus hirder hollek ar c'hleuzioù diwar e atant, neuze eo simploc'h an difraeoù : n'eo ket ret dezhañ diskleriañ na bezañ ambrouget gant ur c'huzulier war ar girzhier evit ma rafe war-dro ar c'hempouezañ evel m'eo ret. Ha bep bloaz e c'hell ober memestra en-dro ma fell dezhañ. Dindan un nebeud bloavezhioù e vo disteraet ar c'hleuzioù hep na vefe posupl gouzout m'eo bet graet hervez ar reolennoù.

DISTRUJ TAMM-HA-TAMM EVIT CHOM HEP BEZAÑ TAPET

N'eo ket diaes mont e-biou d'an « Doareoù Dereat al Labour-Douar hag an Endro » (BCAE 8) : trawalc'h eo krignat ar c'hleuzioù tamm-ha-tamm : un dornadig gwez diskaret ar bloaz kentañ, re all ar bloaz war-lerc'h, he kement zo... « *War zisteraat e ya niver ar gwez, hag a-benn ar fin n'ez eus ket eus ur c'harzh ken* », a zispleg Katell, teknikourez er Mor-Bihan.

Evit mont war an tu-se ivez e c'heller c'hoari gant ar gerioù : ur « *steudad gwez* » n'heller ket lavaret ez eo ur c'harzh, ha neuze n'eo ket gwarezet gant ar BCAE 8.

« *Ar bloavezh kentañ e troc'hez an holl gwez kelvez a vez e-kreiz, ha gant an dis-koultrerez en em renkez evit na kresk-fent ket en-dro ken, eme Benoît Alain, desaver saout e Plouber (22). War-lerc'h e chom ganit ur steudad gwez, met n'eo ket ar c'harzh ken. Neuze ne vez ket*

kontet gant an DDTM. Ur bern a c'heller gwelet zo bet graet evel-se e-doug an diskaramzer. »

Hag ar pennadoù-kaoz bet kaset en-dro gant *Splann !* a ziskouez sklaer ez eo kustum an doare ober-se. Un teknik all : gant tud zo e vez benet (tailhañ tost ouzh an douar) ar gwez er c'harzh, pe zoken distrouezhet, pezh a zo aotreet gant ar BCAE 8, met pezh a vir ouzh ar gwez da greskiñ en-dro ar bloavezhioù war-lerc'h. Benañ ar gwez⁶ a zo un teknik kozh-Noe, troc'h a reer ar gwez izel-tre, tost d'an douar, evit ma kreskfent en-dro en ur bod, met aze e vez implijet evit diskar ar c'harzh penn-da-benn ha da viken.

« *Lemel kleuzioù tamm-ha-tamm, aze n'eus reolennadur resis ebet war an dachenn-se, evel ma tispleg deomp Katell. Dre vras n'eo ket arbennigourien war ar girzhier kontrollerien an ASP [Ajañs Servij ha Paeamant]. Gouest int da welet ez eus bet diskaret ur c'hleuz, met n'hellont ket gwelet ur c'harzh bet digresket tamm-ha-tamm.* » Evit Katell, teknikourez, ne dlefe ket an distrujoù-se tremen e-bioù da servijoù ar Stad : « *ma vefe eus kontrolloù dre geñveriañ gant ar bloaz referañs, da lâret eo 2015, aze vefe gwelet sklaer, hag e rankfe bezañ kastizet. Met hervezomp ne vez ket graet al labour-se gant an DDTM* ». Ma ne vez ket gwelet, 'vi ket tapet, hervez mod ! Ha war-lerc'h tri bloaz, e vez digastiz diwar hirzale (prescription). « *Lezober eo da vat !* »

6] « Part minimale des terres arables consacrées à des éléments favorables à la biodiversité. Maintien des éléments topographiques du paysage. Interdiction de couper les haies et les arbres pendant la période de nidification », diell displegadur ar BCAE 8 e-keñver ar PAC 2023-2027, ministrerezh al labour-douar



Yann Le Sachter

AESOC'H PAEAÑ UR C'HASTIZ EGET AD-PLANTAÑ

Niver dister ar c'hontrolloù (1 % da 2 % eus an atantoù dindan an norm BCAAER a vez kontrollet war o zachenn bep bloaz) evel m'eo bet diskouezet gant titouroù un dezenn kaset da benn etre 2014 ha 2019 gant Léo Magnin⁷, ha gant danevell Kuzul jeneral ar Boued, al Labourdouar hag ar Maez (CGAAER) e miz Ebrel 2023. Diwar pezh hon eus gelllet gwelet e vefe stankoc'h ar c'hontrolloù abaoe 2023. An displegadenn a zeufe diwar implij an aouegezh artifisiel⁸ a vez lakaet da sellet pizh bep bloaz ouzh ar parkeier war fotoioù dre loarell. Gant ar meziant e vez resisaet a glot gant pezh zo bet diskleriet pe get, ha ma vez douetañs e vo un enseller o teurel

ur sell. Ur goulenn displegadennoù a c'hello neuze bezañ kaset d'al labourerien-douar. N'eo ket ken aes ha ma oa gwechall diskar un tamm mad a girzhier ha kleuzioù.

Pezh zo, n'eo ket ar c'hastizoù a vez kiniget gant ar PBLD, e-keñver arc'hant nemetken, a viro ouzh ar re a o mennet da zistruj ar c'hleuzioù. « *Ur wech stadet m'eo bet diskaret ur c'hleuz, ha p'eo bet kontrollet war al lec'h, n'eo ket un diavañs kement-se (etre 1 ha 5 % eus ar sikourioù hervez gorread m'eo bet distrujet dindan 20 % eus hirder ar girzhier pe kleuzioù), marc'hadmatoc'h a-wechoù eget an adplantañ* », hervez danevell ar CGAAER. « *An dud a oar dre amañ ne baki nemet un digresk war sikourioù ar PBLD eus 3 % d'ar miuañ tout, a zispleg c'hoazh Benoit Alain, desaver loened.*

7] « La haie requalifiée. Enquête sur un dispositif d'écologisation de la Politique agricole commune (2014-2019) », Léo Magnin, Skol Veur Pariz-Reter, 2021

8] « Système de suivi des surfaces agricoles en temps réel », Ajañs ar servijoù hag ar goprou, lec'hienn internet bet lennet d'ar 26 a viz Meurzh 2024

Ur c'hastiz eus 400 €, n'eo ket chalet tud zo gant ken nebeut, ne reont foutre kaer, un tenn ar c'hleuz ! ».

MAERED O VONT EN-ENEP D'O ZEULIOÙ KÊRAOZOURIEZH

Evit ma vefe gwarezet ar c'harzhaoueg, gwelloc'h ober gant Kod ar gêraozouriezh⁹. Pe sañset eo, bepred. Ma kaver gizhier ha kleuzioù war SLK (Steuññ Lec'hael ar C'hêraozañ, PLU) ur gumun, ne c'hellont ket bout distrujet¹⁰ hep doujañ ouzh un henten melestradurel strizh¹¹. An hevelep reolenn a dalvez evit an holl, pe e vefer labourer-douar pe get. Met evel-just ne dalvez nemet evit ar c'humunioù a vez dindan un SLK (PLU), ha n'int ket holl anezho, ha ret eo ivez e vefe bet renablet hag evezhiet mat an holl hirderioù girzhier ha kleuzioù.

War reolennadur ar c'humunioù ez eo resisaet dre ar munud an doareoù ma c'heller diskar ha kempouezañ (adplantañ) girzhier pe kleuzioù (pa vezont renablet war an SLK). Ouzhpenn-se ez int diaes-mat da lakaat e pleustr, ha ne vezont ket kontrollet a-walc'h, a anzav Alain Cupcic, maer e Kergrist-Moeloù, bez-prezidant Kumuniezh kumunioù Kreiz Breizh (22) : « *Sañset, pezh a vez diskaret a vez kempouezet, met gwechoù zo e ranker stourm [ouzh al labourerien-douar].* »

Petra a c'hoarvez neuze pa vez distrujet er-maez lezenn ur c'hleuz war renabl an SLK ? Ret eo d'ar maered mont da

stadañ ez eo bet torret al lezenn. Met dav eo dezho bezañ prest gwiskañ ar chupenn-se, hag a c'hell lakaat en imor ruz lod eus sitoianed o c'humun. « *N'eo ket gwall entanet ar maered pa rankont mont da stadañ un diskar kleuz maez al lezenn, aon ganto pakañ an dorzh d'ar gêr, eme Katell, teknikourez er Mor-Bihan. Ha gwechoù zo e kaver dilennidi prest da asantiñ ouzh un emglev a ya en-enep o zeulioù kêraozouriezh.* »

« *Sañset e vefe ar maered plaset ar gwellañ evit renkañ an traoù, met labourerien-douar eo an darn vras anezho, pa n'emaint ket o tiskar kleuzioù o-unan ...* », a gont deomp Maïwenn, teknikourez labour-douar war ar maez e Aodoù-an-Arvor. Un den barek war ar c'harzhaoueg o doa c'hoant chom dizanv en deus lâret deomp : « *c'hoarvez a ra da zilennidi zo ma c'houlennfent digant o zeknikourien chom hep komz re eus ar gwe a vez graet d'ar reolennoù SKL, ha da chom hep hegasiñ re al labourerien-douar. Tevel eo ar gwellañ mevel pa rankfer komz eus kleuzioù...* ». Hervezañ eo ken diaes kaozeal eus ar girzhier hag ar sujedoù all diwar-benn al labour-douar.

Al lusk sokial labourerien-douar a zo bet e-pad ar goañv 2023 en deus lakaet ar jeu da vezañ tennoc'h-tennañ war an dachenn. Lod eus an dud o deus komzet en enklask-mañ e penn kentañ o deus bet c'hoant chom dizanv da c'houde, kuit da gaout kudennoù.

**Yann-Malo Kerbrat
ha Nolwenn Weiler**

9] Pennad L113-1, Kod ar c'hêraozañ, bet embannet e miz Genver 2016

10] Pennad L113-2, Kod ar c'hêraozañ, bet embannet e miz Genver 2017

11] « Protection juridique. Des haies, arbres et boisements », fichenn al lezenn, LPO Frañs, miz Even 2022

MET PENAOS SAVETEÏÑ GIRZHIER HA KLEZIOÙ?

Niverus eo an ostilhoù da wareziñ ar c'harzhaoueg, padal n'eus ket a-walc'h diouto, ha gwall-efedoù zo gant lod outo ouzhpenn-se. Harpañ al labourerien-douar oc'h ober gant doareoù padus, aze emañ an dalc'h.



Yann Le Sacher

- 】 Plantañ gwez n'eo ket trawalc'h evit gwareziñ ar c'harzhaoueg.
- 】 Ma n'eo ket gopret ha skoazellet gwelloc'h an desaverien loened astennidik ha bio, kempenn girzhier a vo ur c'houst re ger evito.
- 】 Gant strollegezhioù zo e vez arc'hantaouet chanterioù labourerien-douar a fell dezho diskar klezioù. Ur strategiezh a gas he reuz.
- 】 Diorren an hentenn koad-energiezh a ro he zalvoudegezh d'ar c'harzhaoueg, gant ra riskl ez afe re bell an digodañ.

Nebeutoc'h-nebeutañ a beizanted, atantoù brasoc'h-brasañ, niverusoc'h-niverusañ ar girzhier diskaret.

A-feur ma ya da get an atantoù bihan e kemm da vat an dremmvro. « *Evit saveteiñ ar girzhier e rankfed plediñ gant abeg ar gudenn, hag ober e seurt ma vefe desachus patromoù labour-douar doujus evit ar gwez, da lâret eo an desevel loened a vez o peuriñ, ha neuze bio* », a zispleg ar sokiologourez Catherine Darrot, bet kaset en-dro ganti un enklask a ziskouez splann ez eo ar patromoù-se a ro digarez da blantañ ha da gempenn girzhier.

Mont a reomp war-zu staliadurioù atantoù ha ne gempouezont ket ar re a ya kuit, koulskoude, dreist-holl evit pezh a sell an desaverezh loened [*len-nit hon enklask «Brezel ar parkeier»*]. « *N'eo ket warc'hoazh ma vo eus Breizh un douar edeier, eme Rannvro Breizh da Splann ! A-drugarez d'he strategiezh staliadurioù ha treuzkas an atantoù e fell d'ar Rannvro chom un douar lies-gounidegezh ha desaverezh loened (...) Staliñ labourerezed ha labourerien-douar nevez ha treuzkas an atantoù, sed aze pezh zo bet lakaet da gentañ gant ar Rannvro e-doug ar mandad, evit pezh a sell politikerezh al labour-douar.* » Brastres-ren an atantoù (SDREA), un teul hag a ro reolennoù dereiñ an douaroù, ha bet degemeret e miz Here 2023, a ya war an tu-se. Kavout a reer meur a stignad

skoazell ar staliñ hag ar bio, ha gant ar strollegezhioù lec'hel e vez roet ur sikour arc'hant d'ar re a zoug ar raktresoù zoken.

Met kement-se n'eo ket trawalc'h evit kempouezañ an niver bras a labourerien-douar o vont war o leve, hag alese ar fed e vefe an atantoù war vrasaat. Pezh a zo aesaet c'hoazh gant ar PBLD (PAC)¹, pa vez liammet o sikourioù gant gorread douaroù al labourerien-douar dreist-holl. Met lod eus ostilhoù dispaket gant ar rannvro a c'hellfe kaout gwall-efedoù war ar c'harzhaoueg ivez. Evit aesaat ar staliadurioù, da skouer, ez eo aesaet ivez an eskemm parkeier. Met riskloù bras zo e c'hell an adframmañ parkeier kas d'un distruj bras a girzhier ha kleuzioù.

HENTAD AR C'HOAD, UR GONTELL DAOU DU

Er penn-kentañ eus an talvoudekaat koad ar girzhier emañ Bro-Dreger, a-drugarez da grouidigezh Bocagénèse e Plouared e 2013², (22). Penaos e ya en-dro ? Tommerezhoù kumunioù evit kas gwrez d'ar savadurioù publik, en ur implijout koad tennet diwar girzhier ar vro. « *E Plouared e vez implijet tri zeknikour e-karg eus diskoultrañ ar girzhier war vord an hentoù, a zispleg David Rolland, kargad a gefridi « Annez ha bev-liesseurted » e kevredad chaseourien Aodoù -an-Arvor. Ul labour troc'hoù a-zoare a vez graet ganto,*

1] « L'évolution de la répartition des aides directes du fonds européen agricole de garantie (FEAGA) et leurs effets (2008-2015) », lizher eus Lez ar C'hontoù bet kaset da vistrerezh al labour-douar, miz Here 2018

2] « Bocagénèse. La filière bois énergie sur la sellette », Philippe Gestin, Le Trégor, 2016



Yann Le Sachet

quelques témoins sur Kalis arase.

kleizhennet-mat eo ar gwez, n'int ket bloñset evel gant an diskoultrerezed. Fier int eus o labour, ha kaer eo trowardroioù ar gumun. » Ouzhpennañ a ra Annie Bras-Denis, maerez ar gumun : « Evel-se e vez rentet servij d'al labourerien-douar, pa ne goust netra dezho, hag e c'heller kenderc'hel da eskemm diwar-benn ar gwez, p'emañ a-wechoù danvez tabutoù war ar maez. »

E Breizh eo bet heuliet skouer Plouared, ha diorren an hentad koad-energiezh a zo unan eus an ahelioù labour evit teknisianed ar c'harzhaoueg. « Un nemedenn eo tiriad Lannuon e Breizh, hag er Frañs zoken, evel ma tispleg Aline Danguin, prezidantez kevredigezh

teknikourien diazadoù doureier Breizh (ATBVB). Ur patrom a c'hellfe bezañ kaset pelloc'h, met n'eo ket c'hoarvezet evit poent. »

« Gant lod eus ar strollegezhioù e vez roet an dorn d'an hentad, met re all n'int ket ken entanet-se », a ouzhpenn Caroline Sourisseau, teknikourez e Pondi (56) ha « dave garzhaoueg » evit an ATBVB. Chom a ra un diaester, hervezi : « Kalz eus an dommerezhoù-se zo re rankus evit gellet degemer koad girzhier, leun a boultrenn, pezh a vir ouzh ar skolpoù da dremen dre greiz ar mekanikoù. »

« Reiñ un dalvoudegezh ekonomikel d'ar girzhier, sed aze peadra da wareziñ anezho, da greskiñ an niver anezho », setu pezh a

Daoust da live uhel ar postadurioù arc'hant publik e chometre daou an disoc'h.

soñj Catherine Moret eus ar gevredigezh Afac-Agro-foresterezh. Memes ali a zo gant kambr al labour-douar. Hervezo implijout ar c'hoad evit en em dommañ a vefe unan eus an diskoulmoù da saveteiñ ar girhize. « *Met dav eo sevel ur framm evit ma vefe talvoudekaet, kuit na vefe lakaet an arigrap war an danvez* », eme c'hoazh Catherine Moret. Julie Le Pollès a zo teknikourez garzhaoueg : « *Ret eo kaout teknisianed oc'h heuliañ ar raktresoù zo er strollegezhioù, evit ma ne drofe ket war-zu un diorren ekonomikel hepken. Ar c'hontrol eus pezh a fell deomp a c'hoarvezfe : girzhier drailhet, ne vefent ket renevezet, un taol fall 'vefe !* »

Arbennigourien all war an danvez a soñj ganto ne vefe ket eus ar poellekañ ober un danvez ekonomikel eus ar girzhier. « *Klask tommañ ar c'hêrioù gant koad ennañ diwar girzhier a ya da*

*get, ne seblant ket bezañ un dra vat, eme diouzh e du Thierry Guéhenneuc eus ar gevredigezh Douar ha Girzhier (Terres et bocages). Gwelloc'h eo tennañ gounid eus ar c'hoadoù evit-se. Rak er c'hontrol eus ar girzhier ez eo kresket gorread ar c'hoadoù e Breizh en 20 vloaz tremenet. Ha marc'hadmatoc'h e vo. » Padal e tispleg deomp ar gevredigezh Gwez (L'Arbre) : « *Gwechall e veze implijet koad ar girzhier evit kaout prenn (koad da labourat). Abaoe meur a vloaz emañ hor c'hevredigezh o stourm evit ma vefe anavezet**

ar mod-se da bourveziñ koad evit ar savadurioù da zont. » Gant e berzhioù mat : un implij padus eus gwez ar girzhier, ha gounidoù uheloc'h evit ar berc'henned pa c'heller sevel koadaj a bado kantvedoù, er c'hontrol eus ar plaketenoù a vez lakaet en tommerezhioù.

PLANTAÑ GWEZ, EVEL-JUST, GANT MA...

Plantañ gwez eo an tu anavezet gant ar bolitikourien pa fell dezho broudañ ar girzhier. E Rannvro Breizh ez eo ar programm rannvroel Breizh Bocage, krog ken abred ha 2008. El Liger-Atlantel ez eo ar steuñv Liger Bocage kaset en-dro gant ar rannvro Broioù-al-Liger e 2021. Pa seller buan ez eo bamus ar sifroù kentañ bet embannet gant ar strollegezhioù : 6.500 km girzhier bet plantet gant ar programm rannvroel Breizh



Yann Le Sachet

Bocage abaoe 2007, 50.000 gwezenn a vez plantet³ bep bloaz gant departamant Penn-ar-bed, 15 kilometrad ouzhpenn⁴ war diriad sindikad diazad dourioù Chère Don Isac (44) ac’hann da zibenn ar goañv 2024...

« Diskouez a ra Breizh Bocage pegen efedus eo bet e brogramm, ha d’ar c’houlz mat, a ziskler Rannvro Breizh da Splann !. Hiriv an deiz ez eo 44 strollegezh

a zo engouestlet er programm-se, pezh a ra war-dro 90 % eus tiriad Breizh. War ar programmatur 2015-2022, ha dre ar FEADER ez eo e Breizh en em gav tro-dro da 65% eus ar strivoù broadel evit pezh a sell ar plantañ gwez. »

Daoust da live uhel ar postadurioù arc’hant publik e chom etre daou an disoc’h : m’eo bet stabilaet hirder hollek ar girzhier e Rannvro Breizh abaoe

3] « Plan 500 000 arbres », Departamant Penn-ar-Bed, lec’hienn internet bet lennet d’ar 26 a viz Meurzh 2024

4] « 1er bilan positif pour les plantations Liger Bocage », Sindikat Chère Don Isac, lec’hienn internet bet lennet d’ar 26 a viz Meurzh 2024

2020⁵, mont a ra kalite ar c'harzhaoueg war an diskar memestra [lennit pennad 2]. « *Pezh a fell dezho ez eo embann sifroù, eme gant dipit Erwan⁶, teknisian garzhaoueg en ur strollegezh. Keuz 'meus ne vefe ket postet muioc'h a arc'hant er mont en-dro gwareziñ gwelloc'h pezh a zo dija.* »

ARC'HANTAOUÏÑ DISKAR AR C'HLEUZOÛ ?

Ur redi d'al labourerien-douar a fell dezho diskar ur c'hleuz ez eo adplantañ d'o c'houst ur c'harzh nevez evit « kempouezañ » an hini bet diskaret. Strollegezhioù zo a deus bet graet an dibab da gemer ar c'houst-se en o c'harg, evel kumuniezh kumunioù Maen ar Boudiged (35). Ur strategiezh degemeret fall-tre gant teknisianed garzhaoueg zo, rak evito ez eo evel reiñ arc'hant publik evit ar re a zistruj. Léa Lengentilhomme zo teknikourez e Maen ar Boudiged a zispleg ouzhpenn : « *Rebechet eo deomp e-leizh, met d'en nebeutañ e ouzomp, pa vezomp galvet gant ul labourer-douar a fell dezañ diblasañ ur c'hleuz, d'an nebeutañ e ouzomp pezh zo bet distrujet.* » Hag evel-se e c'hell lakaat he zroad en atant, ha dont a-benn da gendrec'hiñ al labourer-douar da lakaat plantañ girzhier ouzhpenn gant Breizh Bocage, en tu all d'ar sammad digoll a vez tapet gantañ. « *Ha dre vras e vez plantet teir gwech*

muioc'h eget pezh a vez distrujet en atantou pa c'hellomp ambroug an distrujoù. » Gant departamant Penn-ar-Bed ivez e vez arc'hantaouet ar c'hempouezañ girzhier diskaret, e diabarzh framm ar platañ 50.000 gwezenn ar bloaz. « *Forzh penaos, ur paotr a fell dezhañ diskar ur c'hleuz a raio, a zispleg Loïc Varet, karget a gefridi. Met graet eo bet ganeomp un dibab, arc'hantaouiñ ar c'hempouezañ pa vez plantet en-dro kement ha 135 % eur ar c'harzh bet distrujet hepken, hag evel-se e c'hounezet.* » Dont a ra ar plantañ evit « kempouezañ » da dost 20 % eus hollad ar chanterioù arc'hantaouet, hervez e gontoù.

Ambroug ar re a vez o tistruj, sed aze un dibab douget gant dilennidi zo ivez. Annie Bras-Denis, maerez Plouared, a zispleg deomp : « *C'hoarvez a ra deomp rankout cheñch penn d'ar vazh war teuliad pe deuliad, gwir eo. Gant ar pal gwareziñ gwriad ar girzhier o hirder hag o stankter, en ur zegemer emdroadurioù pa vezont ret. Dav eo kemer amzer da hanteriñ ha da gompren. Morse ne vez kollet an amzer-se », emezi c'hoazh, rak meur a wech e oa aet war an dachenn evit arguzenniñ, marc'hata gant tud tapet e gaou evit bezañ bet o tistruj kleuzioù. « *Pa vezer dilennet ez eo evit lakaat da gen-vevañ ur gumuniezh gwazed ha maouezed, ha chom madelezhus kement ha ma c'heller.* » Rak peadra zo da sevel tabutoù taer pa vezer o komz eus girzhier en ur*

Atav e klaomp mirout ar girzhier hag ar c'hleuzioù.

5] « Évaluation du programme Breizh Bocage 2 », Tanguy Chever, Sibylle Parant, Adèle Gonçalves, Sébastien Guilbert, AND International Edater, Rannvro Breizh, miz Ebrel 2021

6] An tud a zo ho anv bihan en destenn hepken zo bet cheñchet oc'h anv.

gumun war ar maez, ha diaes e c'hell bezañ lakaet ar maer gwechoù zo [lennit pennad 3].

D'AN DILENNIDI DA REIÑ AL LAÑS

Evit Thierry Guehenneuc, eus ar gevredigezh Terre et bocage, pezh a gont ez kemer perzh hag emrenerezh al labourerien-douar. « *Ma n'eus ket amzer nag arc'hant gant ur peizant evit plantañ gwez, ne raio ket war o zro goude-se kennebeut* », emezañ. Ur c'hant bennak a labourerien-douar zo bodet er gevredigezh a oa bet ken-savet gantañ e 2008, en Aodoù-an-Arvor evit an darn vras anezho. Frammet int a-stroll evit kempenn ha reneveziñ

ar c'harzhaoueg war o atantoù. « *Ret-mat eo d'al labourerezed ha labourerien-douar bezañ o kemer perzh, emezañ c'hoazh. Lakaat gwez ar c'hirzhier da vezañ ur c'hounidegezh lakaet e-touesk er sistem produiñ hollek.* » Evel ma vez graet evit atalieroù all an atant, d'al labourerien-douar o-unan da zivizout pelec'h ha pegoulz e kasont al labourioù en-dro.

A-bouez-bras eo neuze e teufe da vezañ ul labour boutin, rak aet eo ar c'harzhaoueg war ziskar dre ma vez muioc'h-mui pep hini diouzh e du el labour war ar maez. « *Da geñver hon studi hon eus merzhet ez eo yac'h ar girzhier plantet en-dro pa c'hell al labourerien-douar kontañ war o rouedad, familh,*

« **Ar gwez ar c'hallfe bezañ ur c'hounidegezh lakaet e-touesk er sistem roduiñ hollek.** »

amezeien, mignoned, embregerezhioù labour-douar, kevredigezhioù, ha kement zo... », a ziskuilh ar sokiologourez Marie Toussaint. « *Ur wech m'eo bet dibabet ha plantet ar gwez ganit da-unan e vezez kalz dedennetoc'h gant da c'harzh, ha gellet a rez sellet outi kreskiñ, c'hoant 'peus e chomfe yac'h* », evel ma kadarna Sylvie, desaverez loened e bio en Il-ha-Gwilen, pa chom ganti un eñvorenn c'hwek eus ar chanterioù a-stroll kaset gant keneiled evit plantañ girzhier an eil ti egile.

Moarvat e chom diaes klask toullañ kaoz gant labourerien-douar zo, nebeut a c'hoant ganto plantañ girzhier. Dilennidi o tont da gemer perzh er gaoz, prest da eskemm e-barzh porzh

an atantoù, se a c'hell lakaat tud zo da cheñch hag aesaat labour an dekniansaned. Guillaume Demange, animator Liger Bocage e sindikad Chère, Don, Isac (44), a ro e desteni : « *E 2018 e oa bet ar stêrioù o tic'hlannañ e Kastell-Briant (44) ha merket don eo bet an dud hag an dilennidi en o zouez. Pezh a felle deomp e oa reiñ lañs d'ar plantañ gwez evit klask mirout ouzh krignerezh an douaroù, ha gwellaat kalite an dour.* » Ar c'harzhaoueg a c'hell ren-tañ meur a servij war an eko-sistem, hag e-touez traoù all evit merañ red an

**Gant ar garzhaoueg
e vez kempouezet
an temperadur,
gwarezet an
trevadoù diouzh
an avel.**

dourioù hag aesaat an dour d'en em si-lañ en douar, e-touez traoù all. « *Aze er Chapel Glaen, eo aet an eil-maer da welet an 30 labourer-douar war ar gumun evit displegañ e oa yalc'hadoù da gaout evit plantañ gwez en-dro.* » Asantet gant an hanter anezho. Hag ez eo pemp kilometrad a girzhier a oa bet plantet ar goañv goude. Ma n'eo ket touellet memestra gant un endro diaes evit difennerien ar girzhier, e c'hell lâret : « *N'eo ket kollet tout ar stourm.* »

**Yann-Malo Kerbrat
ha Nolwenn Weiler**

GWIENN : KER E KOUST AR C'HEHENTIÑ UHELGAS D'AR C'HLEUZIOÙ

Abae ma tispaker ar wienn war zouar Breizh ez eus bet reuz ha freuz ouzhpenn war ar girzhier hag ar c'hleuzioù. Chanterioù troc'hañ prientet fall alies-kaer, diaes da empentiñ en a-raok dre m'emañt er-maez ar reolennoù lakaet war chouk al labourerien-douar ha war ar c'humunioù evit gwareziñ ar gwez.



Yann Le Sachet

- 】 Dispak ar wienn dre an aer dreist-holl a zegas freuz bras er c'hleuzioù.
- 】 N'eus redi ebet da ziskleriañ an distrujoù-se, er c'hontrol eus ar reolennoù a dalvez e bed al labour-douar.
- 】 Gwechoù zo n'eus ken-emglev ebet gant ar strollegezhioù, ha ne vez ket empentet a-walc'h ar chanterioù en a-raok.

Dav eo bezañ war evezh pa vezer o pourmen war an hentoù war ar maez evit gwelet peseurt girzhier zo bet gwallgaset gant an diskoultrereziou. Hini ebet na ya e-biou da selloù Jean-François de Ramecourt, prezidant rann Liger-Atlantel Fransylva, Kevread forrestourien prevez Frañs koulskoude. Hag en ur sellet ouzh tud o tiskargañ peulioù da vezañ implijet evit stagañ ar wienn diwar ur c'hamion ken ledan hag hanter an hent, e oa o tiskouez deomp gwez diskoultret diouzh un tu hepken, evel stouet ha prest da gouezhañ : « *Sellit aze, krennet eo bet lein ar gwez derv a-vizie eus tu an hent, goude-se eus tu ar park, e stumm ur biramidenn. Hag e c'hellit bezañ sur e vint dibennet ar wech a zeu, da lâret eo e vo tennet o fenndogenn diganto, peadra da lakaat buhez ar gwez-se en arvar.* » Perc'henn eo war un nebeud parkeier gwez tro-dro dezho, ha tae-riñ a ra pe wel ur seurt « *lazhadeg* » war an abeg ma ranker diorren ar wienn.

« *Distruj a weler a bep tu* », a ouzhpenn e vignon Yann, kenberc'henn war ur c'hoad meur a gant devezh arat, ennañ ur steudad gwez heverk e vefe sañset da vezañ diskoultret abalamour ma rankfe tremen ar wienn eno. Met nac'het eo bet gantañ. « *N'o deus ket kredet troc'hañ ar gwez kant vloaz zo war vord an hent, met lakaat a raint da zibennañ ar gwez bihanoc'h, evel el lodenn-se eus an dachenn lec'h m'o deus kroget gant an dispak, hag a-benn ar fin e viro ouzh ar gwez da greskiñ er steudad-se* », emezañ, keuz en e vouezh. « *Reishañ tra a vefe*

bet douarañ ar wienn », a respont Jean-François de Ramecourt. « *En tu all da 50 % eus ar rouedad kas uhel-kenañ ar wienn optikel zo bet douaret, eme diouzh e du Departamant al Liger-Atlantel, bet goulennetaet gant Splann !. Un tamm mat keroc'h eo douarañ ar wienn eget dispakañ anezhi en aer, pezh a ya kalz buanoc'h war-zu hollad annezioù al Liger-Atlantel (a vo goloet 100 % tro 2025).* »

UR FAKTURENN BRAS EVIT BREIZH

Reuz ha freuz ivez e departamantoù Rannvro Breizh gant dispak ar c'has uhel-kenañ : « *Meur a c'harzh zo bet distrujet, gant aon ma vefent direnkus* », a zispleg Aline Danguin, teknikourez e Pondi, ha prezidantez kevredigezh teknisianed diazadoù doureier Breizh (ATBVB). « *Pa vez dispaket ar wienn en aer e c'heller bezañ kazi sur e vo troc'het berr ar c'harzh en he c'hichen* », a soñj diouzh e du Thibaut Preux, douaroniour. An dilennidi

bet goulennataet gant Splann ! a lak ar pouez war goust ar rouedad ma vefe bet douaret penn-da-benn : « *Gwell eo bet kavet gant ar Rannvro staliañ an tiriadoù par ma c'hell, kentoc'h eget douarañ ar wienn, re ger e vefe bet en holl d'an holl* », a zispleg deomp Carole Le Béhec, dilennet er C'huzul Rannvro ha prezidantez bodad an hin, treuzkemm ha bev-lies-seurted. « *En tu all d'ur miliard a euroioù e vefe erru ar facturenn* » evel ma fell lâret da Vincent Alleno, aotrou maer Pleneventer ha bez-prezidant Mégalis, ar sindikad kemmesk e-karg eus ar

« **Distruj a weler
a bep tu.** »

raktres « Breizh Kas Uhel-kenañ ». Daoust ha meneget e oa bet, er galv da ginnigoù kaset d'an embregerezhioù evit dispakañ an 50.000 kilometrad funioù, e oa ret dezho soursial eus ar girzhier ? Evit respont ouzh goulenn savet gant *Splann !*, Vincent Alleno a ranke anzav ne ouie ket. Hag evit pezh a sell ar c'haier kargoù dalvez da steuñv evit an dispakañ, kaer hon eus bet goulenn anezhañ meur a wech digant Mégalis, tro wenn ! « *Er c'henmglev dileuriañ ar servij publik gant an dileuradour Fibre44 e-karg eus an dispakañ gwienn ez eo mene-*

get sklaer engouestladur an embregerezh a-fed gwarez an endro », a respont diouzh e du Departamant al Liger-Atlantel en doa silet dre un addiviz e 2022 un diferadenn evit strishaat marevezh an diskoultrañ etre ar 15 a viz Meurzh hag an 31 a viz Eost. Vincent Alleno, aotrou maer Pleneventer ha bez-presidant Mégalis, ar sindikad kemmesk e-karg eus ar raktres « Breizh Kas Uhel-kenañ » a zispleg: « *Moarvat eo bet teuk lec'hioù zo ar redi da ziskoultrañ, pezh 'neus broudet emzalc'hioù aet re bell ganti.* »

« *Lizhiri zo bet kaset gant an tiez-kêr¹ "trugarez deoc'h da droc'hañ ho kirzhier evit ma vefe gellet lakaat ar wienn da dremen", ha gant tud zo eo bet soñjet e oa ret troc'hañ pep tra, padal ne veze goulennet nemet un taol kempenn* », a zispleg

« Marc'had-matoc'h eo staliañ an tiriadoù eget douarañ ar wienn. »

Aline Danguin, teknikourez ha prezidantez an l'ATBVB. « *Resevet hon eus lizhiri gourdrouzus a venege e oamp rediet da ziskoultrañ dindan ar wienn, ha meneget ouzhpenn e vefe kastizoù arc'hant ha lezennel kenkaz ne sentfemp ket, a garna Jean-François de Ramecourt. Meur a berc'henn zo deredet da droc'hañ o girzhier d'ur metrad hanter diouzh al leur, pe tapet gant ar spont, pe entanet gant ar soñj ober.* » Ar re o doa nac'het, pe ar re zievezh o deus tapet lizhiri rediañ, pe faturenn an diskoultrañ kaset dezho gant an embregerezh², pe gant an ti-kêr. Alain Cupcic, zo aotrou maer Kergrist-Moelo (22)³ ha bez-presidant kumuniezh kumunioù ar C'hreiz-Breizh (CCKB). Ouzhpennañ a ra : « *ur wech peus bet diskoultret hag eo bet staliet ar*

1] « L'entretien des réseaux de communications électroniques : élaguer pour préserver le présent et préparer l'avenir », Cerema, miz Mae 2018

2] « À Bulat-Pestivien, l'élagage facilitera l'installation de la fibre », Le Télégramme, miz Meurzh 2021

3] « Élagage pour le déploiement de la fibre optique », kazetenn kumun Kergrist-Moelo, miz Gouere 2016



wienn, ma tremenez an diskoultrerez ha m'eo troc'het ar wienn ganit, e vo dit-te da baeañ. Hag e kousto dit meur a vil euro evit dresañ ur wienn, hervez an hirder da gempenn. Neuze ez eus bet kalz a dud o soñjal : 'fell ket din poaniañ bep bloaz da droc'hañ ar c'harzh-se, neuze ez eus bet diskaret gwez e-leizh. Kement ma 'eo bet ret d'an ti-kêr dont da lakaat e fri en afer ! »

El Liger-Atlantel eo bet ret d'an departamant gourdrouz goude ma vefe bet troc'het re verr ar girzhier : « C'hoarvezet eo d'an annezidi pe da dud Ofis Frañs ar Vev-liesseurted (OFB) dont da c'hervel

evit menegiñ e oa bet diskoultreret en doare ne glote ket gant hon erbedadennoù. M'eo da vat labourioù kaset da benn war gont ar strollegezh e kasomp keloù d'an embregerezhioù evit degas da soñj d'ar skipailhoù a labour war an dachenn eus ar reolennoù e pleustr. » Ur gudenn all a sav : an diskoultrañ-se, a zeu da ziskar gwez a-wechoù, n'int ket suj da ziskleriadenn ebet. Un doare tremen e-biou d'al lezenn bet roet da stalieren ar wienn, evel m'eo lakaet da c'houzout, ha gant keuz, e danevell miz Ebrel 2023 Kuzul jeneral ar boued, al labour-douar hag an tachennoù war

ar maez (CGAAER)⁴, bet gouestlet d'ar girzhier.

« *Gellet a reomp kenlabourat evit ma ne drofe ket an diskoultrañ da zrailherezh, eme David Rolland, implijad e kevread chaseourien Aodoù-an-Arvor. Ingal e c'hoarvez din kemer ar gaoz evit reiñ alioù d'ar berc'henned, diwar c'houlenn an tiez-kêr da skouer. Ha lod eus an deknisianed garzhaoueg a ra memes tra.* » El Liger-Atlantel eo bet skoulmet darempredoù etre dileurader Fibre44 hag an Afac - agro-foresterezh (kevredigezh broadel « a labour evit ar gwez hag ar girzhier ») evit stummañ eil-kevraturien gouestlet d'an diskoultrañ. « *Bewech ma oa posupl omp aet e darempred gant ar re a oa karget da staliañ ar wienn, evit ma vefe bet graet a-zoare, a resisa Julie Le Pollès. Met alies-kaer ne veze ken-emglev ebet gant an eil-kevraturien.* » Meur a hini bet goulennataet gant *Splann !* zo bet o venegiñ kudenn an eil-kevraturien, hag evito e oa ur skoilh diaes da zirouestlañ.

Gant strollegezhioù zo ez eus bet kavet gwell kemer al labourioù diskoultrañ e karg, hep gervel eil-kevraturien. War gumun Plouared, da skouer. « *Rag-empentet eo bet an traoù ganeomp, diblaset hon eus hor chanterioù diskoultrañ evit ma vefe graet ganeomp lec'h ma oa ar wienn da vezañ staliet, kuit d'an dud d'ober o-unan* », a zispleg deomp Annie Bras-Denis, maerez ar ger-mañ eus

« Ne vez ket diskleriet pezh a vez troc'het pe diskaret. »

aodoù Bro-Dreger. Ha stummet eo bet ar gargidi lakaet da aozañ al labourioù, kuit na vefe bloñset ar gwez. « *Ne implijont ket an diskoultrerezhioù, pa vez drastet ar gwez ganto peurvuiañ* », emezi c'hoazh. Dispakañ ar wienn « a vefe bet tremenet seizh mil gwech gwelloc'h ma vefe bet empentet en a-raok, aozet ha divizet etre an oberourien », eme Julie Le Pollès evit klozañ ganti. Siwazh, « *diouzh pezh zo bet lâret deomp gant kalzig a dud eo bet labezet ar girzhier* ».

DOUAROÙ GANT PANELLOÙ-HEOL

Estreget ar wienn a gaver da venveg « modernizaaat » hon doareoù bevañ hag a zistruj ar girzhier hag ar c'hleuzioù. C'hoarvez a ra e vefe troc'het gwez zo, pe en arvar da vezañ emaint, war zigarez « treuzkemm energiezh » zoken. E-tal Roazhon, e

4] « La haie, levier de la planification écologique », diell n°22114 eus ar CGAAER, Catherine de Menthère, Patrick Falcone, Vincent Piveteau, Xavier Ory, ministrerezh al labour-douar, miz-Ebrel 2023

« Tost da 3.000 gwezenn hir o fustoù bet drailhet gant rouedad an SNCF. »

Saozon-Sevigneg, e komzer eus diskar 3.000 gwezenn evit staliañ panelloù foto-voltaek en o flas. « *Pemp kilometr a girzhier bet plantet 7 pe 8 vloaz zo evit kempouezañ al linenn tren LTB, pa oa bet meur a zistruj evit sevel anezhi* », evel ma tispleg deomp Edgar Blot, fulor ennañ. Prezidant kevredigezh gwareziñ endro bevañ kêrioù traoñ Saozon eo. Aze, etre, an hent-houarn hag an hent-departamant e krog ar c'harzh da vezañ fonnus a-walc'h. Enni e kaver-e-touez re all- gwez derv, mesper, onn, kignez ha pabu pe hili-ho ...kement seurt hag a zegemer ur vev-liested ledan a-walc'h.

« *Pa soñjan emaint o vont da ziskar pep tra... N'eus ket tu !* », emezañ c'hoazh gant dipit.

Moarvat e pado meur a vloaz an afer, peadra da reiñ amzer d'al laboused da neizhiañ didrabas. Padal n'eo ket bet ken laouen al laboused veze staliet a-hed hent-houarn Ar Mañs - Añje. Etre miz Ebrel ha miz Gouere 2019, pa oant gant o neizhiadur, eo tost da 3.000 gwezenn hir o fustoù bet drailhet gant rouedad an SNCF, an iskevredad e-karg eus empenn al linennoù hent-houarn. Degadoù a c'hegied du, a bennduiked hag a laouened a zo marvet ar bloaz-se moarvat. Tapet an embregerezh gant he daouarn er sac'h a-drugarez da implijidi Ofis Frañs ar vev-lies-

seurtes (OFB), ha kondaonet eo bet e miz Eost 2022 da baeañ 450.000 euro kastiz. « *Kompren a reer ar sammad kastiz ken uhel pa weler pegen grevus eo bet an drouk graet d'an endro*, eme Benjamin Hogommat, gwiraer ar gevredigezh Frañs Natur Endro a oa kevrenn geodedel en afer, e-tal an LPO, Kevre Gwarez al Laboused. *Emichañs, da heul ar varnadenn-se, e vo aketusoc'h ar verourien embregerezhioù a bled gant al linennoù tredan ha gaz, pe an hentoù.* »

**Yann-Malo Kerbrat
ha Nolwenn Weiler**



Setu Jean-François Ramecourt, prezidant Fransylva 44, dirak ur park e-lec'h ma zo bet diskaret kleuzioù.



Orjalennoù internet a-us d'ur c'hleuz bet troc'het.



Drouk eo bet graet d'ar gwez en ur gempenn ar c'hleuzioù.

Ne chom ket kalz tra war ar girzhier-mañ. O klask mirout anezhi emañ an dud o chom tro-dro.



Pouezus-kaer eo ar garzhaoueg e-keñver cheñchamant an hin.



A-raok e oa ur bern kleuzioù tro-dro d'ar park-mañ. Bremañ 'neus ket ken.

**Quentin Vernault /
Les Champs d'ici**



Lakit hoc'h anv a-benn degemer al lizher-kelaouiñ !
Dedennet oc'h gant ar pezh a c'hoarvez er vro ? Gant an endro hag al labour-douar ? C'hoant 'peus bezañ titouret pa 'vez embannet un enklask gant *Splann!* ? Gall a reoc'h heuliañ ha souten ac'hanomp en ur lakaat hoc'h anv a-benn degemer hol lizher-kelaouiñ bep miz war www.splann.org

Klevet 'peus kaoz eus Splann ! ?

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet.

Erruet eo *Splann !* d'ur mare eo diaesoc'h diaesañ ar jeu evit ar gazetennerien. E Breizh, ouzhpenn 500 kazetenner o doa sinet ul lizher digor kaset d'ar rannvro e 2020 : ganto e oa bet embannet sklaer ez eus diaezamantoù bras evit titouriñ mat an dud diwar-benn industriezh gounez-vouedel ar vro. Kement se a zo, evel-just, chalus-tre evit ar geodedourien. Soutenet eo bet al lizher-mañ gant 50.000 a dud. Kazetennerien 'vez paeet gant *Splann !* a-benn kas enklaskoù don war an hir-dermen. Pep tra a-drugarez d'ar re a harp ar gevredigezh. Embannet e vezont digoust war he lec'hien ha gant mediaoù a genlabour gant *Splann !*

Ur media dizalc'h...

Muioc'h mui e teu da vezañ mediaoù gall e daouarn tiez-bank hag embregerezhioù bras. Ar c'hontrol-mik a vez graet gant *Splann !* Arc'hantaouet e 'vez an enklaskoù gant ar geodedourien 'zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ.

Tost an holl arc'hant 'vez tapet gant *Splann !* 'zo bet roet gant an dud, en linenn pe dre chekenn. Gall a ra ivez bezañ arc'hantaouet gant kevredigezhioù all a zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ, pe gant yalc'hadoù 'zo. Met ne 'vez ket degemeret arc'hant na digant embregerezhioù, na digant strolladoù politikel, na yalc'hadoù digant strollegezhioù lec'hel. Gant *Splann !* 'neus ket na perc'henner pinvidik na bruderezh na kevranegerien (actionnaires, en galleg). Ur c'homite evezh a ra war-dro eus pelec'h e teu an arc'hant a-benn ne yafe ket a-enep karta embann *Splann !*

... hag a zifenn an enklaskoù war an hir amzer

Aet eo da vezañ primoc'h-primañ bed ar c'heleier. Ganeomp-ni 'vez difennet ur c'hazetenniñ war an hir-amzer a-benn lakaat ar gaoz war sujedoù kizidik e Breizh. O chom er vro emañ kazetennerien *Splann !* Eus Naoned betek ar Gerveur ha Lannuon e 'vez furchet ganeomp a-drugarez d'an titouroù kaset deomp hag hon labour bemdez.

Krediñ a reomp o 'deus ezhomm ar geodedourien eus enklaskoù don ha sirius a-benn ober o soñj dezho war ar bed. Un doare da reiñ ostilhoù a-benn kompren enkadenn sokial, an endro hag an demokratelezh.

Adkavit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

Gwriziet mat eo *Splann* ! E Breizh. Anat eo e 'vez soutenet ar brezhoneg a zegas pinvidikaez hag ur sell disheñvel en hol labour. An holl enklaskoù 'vez embannet en div yezh d'an nebeutañ.

Ur stumm kevredigezhel

Splann ! 'zo ur gevredigezh lezenn 1901 hag eo dreist-holl dre dud a-youl vat ez a endro. En holl, 25 den ouzhpenn 'zo abaoe eo bet krouet *Splann* !, tro-dro da 15 anezho 'zo kazetennerien. Setu an dud a gemer perzh en emvodoù-meur hag o 'deus droet da votiñ. Klask a reomp e vefe ar muiañ demokratel posubl mont en-dro ar gevredigezh. Gant ar c'huzul embann 'vez dibabet sujedoù an enklaskoù hag ar gazetennieren a vo o labourat warno. Gant ar c'huzul-se vez roet skoaz ouzh ar gazetennieren 'zo oc'h enklask. Mont a ra ivez en darempred gant ar mediaoù a embanno pe skigno ar penadoù. Kazetennerien a vicher indi ar re a gemer perzh er c'huzul-embann. Dilennet e vezont gant izili ar c'huzul-merañ hag, izili ar c'huzul-surentez.

Gant kazetennerien pijisted 'vez graet an enklaskoù 'zo bet dibabet gant ar c'huzul embann.

Ober war-dro mont-endro *Splann* ! a vez graet gant ar c'huzul-se. Pep dilennad a zo par d'ar re all a-fed pouezh ha kargoù. Gant bodad-meur ar gevredigezh e vezont dilennet.

Lennit hon enklaskoù diwezhañ war splann.org

- *Breizh : c'hwezh an amoniak er maez*, Caroline Trouillet, miz Even 2021
- *Iberdrola. Pa vez louz ar jeu gant an energiezh « naet »*, Itzel Marie Diaz, Lena Lopes, miz Meurzh 2022
- *Metan : Bec'h d'an atant*, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, miz Gwengolo 2022
- *Essure : drouk mouget e korf ar merc'hed*, Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, miz Here 2022
- *Moc'h fall*, Inès Léraud, Kristen Falc'hon, Floriane Louison, miz Gouere 2022
- *Brezel ar parkeier*, Julie Lallouët-Geffroy, miz Gwengolo 2023
- *Cooperl : enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel*, Kristen Falc'hon, Ivan Logvenoff, miz Du 2023
- *Keuzioù ha girzhier en arvar*, Yann-Malo Kerbrat, Nolwenn Weiler, C'hwevrer 2024

Ezhomm 'neus ac'hanoc'h Splann !



► A-benn goprañ kazetennerien, tresourien, fredoù-hent hag all 'neus ezhomm ac'hanoc'h Splann ! Evit poent eo bet arc'hantaouet hag embannet pevar enklask a-drugarez d'ho tonezonoù.

► M'ho 'peus c'hoant e vefe kendalc'het da vevañ ar c'hazetenniñ dizalc'h e Breizh, harpit ac'hanomp !

Gall a reoc'h reiñ el linenn war www.splann.org pe dre chekenn :

« Da *Splann !* » eo dav deoc'h skrivañ war ar chekenn ha kas anezhi da *Splann !*,

3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe Splann ! enklask diwar o fennoù ?

Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

Mont en darempred

contact@splann.org

Splann !, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Splann !

Ti ar Vro
3, place du Champ-au-Roy
22 200 Guingamp

Kazetennerien

Yann-Malo Kerbrat,
Nolwenn Weiler

Tresadennoù

Yann Le Sacher
Dour ha steroù Breizh

Skudennoù

Quentin Vernault

Bet heuliet gant

Juliette Cabaço Roger,
Inès Léraud,
Faustine Sternberg

Troidigezh

Sten Charbonneau

Laket brav gant

Anne Caillet-Leroy

Difazhiet gant

Juliette Cabaço-Roger,
Julie Lallouët-Geffroy

Imprimeur Cloître
ZA Croas-ar-Nezic
29 800 Saint-Thonan

Menegoù lezenn :
2^e trimestre 2024
ISSN: 2800-664X

